



ANTRETIEN

ETRE JESUS AC AR VUGALE,

EN O C'HOMMUNION GUENTA.

Var ar ton : *Me a gred ferm, etc.*

JESUS.

ME am eus preparet ur Banquet
Ar preciûsa so er bet,
Evit rei d'am oll Bugale
Va C'horf, va Goad a va Ene.

AR VUGALE.

C'hui so meurbet, ô va Jesus!
En hon andret carantezus,
Evit beza deomp preparet
Hirio an deiz ur seurt Banquet.

JESUS.

Pell bras so emañ o repos
Er Sacramant oc'h ho cortos;
Chetu breman deat an termen
Ma em c'hafot a dra certen.

AR VUGALE.

Allas! siousz, ne gredomp quet
Dont d'ho receo, Salver ar bet;
Ne domp nemet corruption,
Carguet a imperfection.

JESUS.

Mar emsoc'h e pec'het marvel;
Ne zeut quet d'am Banquet santel,
Hep caout quenta remission
Dre voyen ar confession,

O va Salver beniguet! bras eo ho carantez.
 Da chom en tabernacloù guenomp-ni nos ha dezi:
 Unisset hor c'helouou ennoñ gant hoc'h hini
 O c'hortos mont d'an Eêvou da jamæs d'ho meuli.

Me offr va C'hommunion evit gloar an Dreinder,
 Hac en enor d'ar Verc'hes, ar Sant ha Santeset,
 Evit dilivranç ar re pere so er pugatoar,
 Ma pligeo gant va Jesus o receo en e c'hloar.

O madelez infinit eus va Doue oll-buissant?
 Disques a rit din facil o garantez ardant,
 Pa roit ho Corf hac ho Coad da vezur va ene,
 Meulet ra vezo Jesus en douar hac en eê.

Ur mennat a c'houlennañ digueneoc'h, va Jesus;
 Pa zin da gommunia, roit din graçou nerzus,
 Ma ellin ho possedi dre ur guir garante
 Amâ epad va buez hac en eternite.

FIN.

